



Va merc'hodenn

Skrivet gant : Marcel Berrou

Pladenn : tremen'ra pep tra

Didostit ha klevit
Va son, va c'han
Va santimant,
Diwar va merc'hodenn vihan.
Kavet'm'boa `ne'i mareoù Nedeleg
War va botez `tal an oaled.

Na kaer, na brav edo,
Sklaer he blev,
Liv flamm he dremm,
Gwisket evel ur briñsezenn.
Daoulagad glas splann e-giz al loar gann,
An heol war he muzelloù.

Va buhez a oa dianken,
Forzh pelec'h ez aen
(navez) ma vezen o pourmen
Atav e vedo em c'hichen
,vit c'hoari ha c'hoarzhin chati'bet,
Morse ne vezen enouet.

Un nozvezh'kreiz va c'houk
Al laer zo deuet.
P'on dihunet,
Va merc'hodenn en doa kemeret
Bremañ, piv `lako' ne'i' da c'hoari ?
Na piv a entento outi ?

An amzer a base.
Gant joa, gant kerse
Ho peus da vale.
An amzer forzh penaos a base
Met chom a ri em fenn da-viken,
Bep noz en va huñvreoù.